

Ar Redadeg evit ar Brezhoneg

1500 km
eus Brest da Zouarnenez
eus an 12 betek an 19 a viz Mae

Ur redadeg a-eilek eo « Ar Redadeg », savet e 2008 hag a vez redet bep daou vloaz. Ur gouel a-dreuz Breizh eo hag a vod an dud deiz ha noz, hep harp ebet. Arouez treuzkas ar brezhoneg a rummad da rummad, ur yezh vev, oberiant ha gant startijenn eo ivez.

Evit skoazellañ raktresoù evit ar brezhoneg e vez gwerzhet kilometradoù. Daparzhet e vez ar gounid etre skolioù Diwan, mediaoù, magourioù, strolladoù c'hoariva, levrioù, c'hoarioù, pourmenadennoù war varc'h-houarn... Gouest eo ar raktresoù da zedennañ an holl ! (gwelet resisoc'h war al lec'hienn)

E 2010 ez eus bet redet 1200 km ha daparzhet ouzhpenn 96 000 € a-drugarez da genskoazell kalz a dud :

- Kumunioù hag o dilennidi,
- Kevredigezhioù pe kleuboù a bep-seurt (sevenadur, sport, media, deskadurezh, gouelioù-meur,..),
- Artizaned, kenwerzhourien, labourerien-douar,
- Embregerezhioù bras ha bihan (bankoù, embregerezhioù labour-douar, krouiñ, stalioù-bras...),
- Hiniannoù : kerent, tud-kozh, bugale, yaouankizoù, tud kar-o-yezh, sportourien,
- Iwerzhoniz, Kembreiz, Euskariz, ha Bretoned Aostralia, a Gebek, Japan... ha lec'h all !

Ouzhpenn 10 000 a dud o deus kemeret perzh bep bloaz. Ar Redadeg a zo un darvoud pouezus-tre e Breizh e lec'h ma c'hell pep hini diskouez emañ a-du gant ar brezhoneg o heuliañ ar redadeg kement hag en deus c'hoant (pe keit ha ma c'hell...). Digoust ha digor d'an holl. Met pa brener ur c'hilometr e c'heller dougen ar vazh-test.

Ar Redadeg a zo ur mare fromus bevet a-stroll, ur gouel a chom merket e eñvorennoù a re a gemer perzh.

Penaos kemer perzh ?

1500 km a hirder a raio ar Redadeg e 2012 ha treuziñ a raio **300 kumun**. E-kichen ho ti e tremeno a dra-sur !

Kit war hol lec'hienn ar-redadeg.org evit kavout tres resis an hentad ha gourc'hemenn ho kilometr en linenn pe pellgargañ ar follenn enskrivadur.

Gellout a rit prenañ ar c'hilometr a-stroll, pe di...(sellet plaketenn evit an tailhoù), kemer anezhañ war anv ur gevredigezh, ur c'hevrenn, ur c'hleub sport, un embregerezh... Brudañ a raimp ho labour.

Ur bern darvoudoù a vez aozet a-hed an hentad gant strolladoù kevredigezhioù, skolioù, strolladoù tud tomm d'ar yezh. Hoc'h intrudu a vo degemeret mat hag un doare e vo ivez evidoc'h da gehentiñ war ho tachennoù-labour (deskadurezh, sonerezh, dañs, gouren, c'hoarioù hengounel, gouelioù-meur ...).

Skignet e vo an darvoud war internet hag heuliet gant kazetennoù, lec'hiannoù internet, chadennoù skinwel, radioioù...

Tu 'zo redek treuzwisket, etre mignoned, gant ar familh, en ur soniñ, heuliañ ar redadeg war droad pe war varc'h-houarn... pe chom war-lerc'h ar rederien evit profitañ eus ar festoù-noz pe ar festoù-deiz, eus an abadennoù c'hoariva, eus ar standoù, an dijuniou... aozet hervez al lec'h ha dreist-holl hervez an eur ma tremeno Ar Redadeg.



Ar pep pouezusañ eo kemer perzh, bezañ gwelet, kaout plijadur, klevout, lakaat da glevout hag ober gant ar brezhoneg !

Hag holl asambles e tiskouezimp hon c'hoant da gaout ur yezh yac'h ha bev e Breizh !